



Emvod distro-skol KSB Disadorn 10 a viz Gwengolo

Un ali a-du war ar « g-Karta mennadoù evit ar re yaouank e Breizh », a vo votet gant ar C'huzul rannvro d'an 21 a viz Gwengolo, ha preder dazont Kuzul sevenadurel Breizh.

Kuzul sevenadurel Breizh a zo ur gambr aliañ, dibar e pennvro Frañs, karget da ginnig alioù hag hetoù war politikerezh publik ar Rannvro war danvez ar sevenadur, an identelezh breizhat ha brud Breizh. Dindan Prezidantezh Paul Molac, 70 dileuriad ar bed kevredigezhel hag ensavadurel ennañ, ha tud perzhek a labour evit diorren sevenadur Breizh.

Goude bezañ kendivizet hag heuliet war evezh emelladenn Sylvie Robert, Bez-prezidantez e karg eus ar yaouankiz e Kuzul Rannvro Breizh, izili ar C'huzul sevenadurel o deus votet gant muianiver un ali a-du war ar « g-Karta mennadoù evit ar re yaouank e Breizh ».

Hervez an ali, ez a war raok politikerezh ar Rannvro e-keñver ar re yaouank war danvez ar sevenadur, en e-zouez sevenadur Breizh, ha brud Breizh: ar stag ouzh an douarou ha mennadoù evit ar re yaouank da gemer perzh e raktresoù sevenadurel a c'hello skoazellañ anezho da embreger kerzhoù nevezhus a drugarez d'an « Défi-Jeunes », bezañs yezhoù Breizh, an istor ha talvoudegezhioù Breizh evel ar c'henskoazell hag an emgouestl.

Ar C'huzul a souten a dost krouadur ul « *Lec'h niverel war ar ouiziegezh* ».

Notennet eo bet mat gant Kuzul Sevenadurel Breizh youl ar Rannvro displeget er garta-mañ met sevel a ra gouelennoù war an araezioù evit sevel ur seurt raktres, peurgetket da geñver ar stummadur kentañ : programmoù skol, da skouer, n'int ket er raktresoù rannvroel. Rannvro Breizh a ginnig rakresoù dedennus evit ar reizhiad skol, med ne 'z eont ket gwall bell-: galvoù raktresoù sevenadurel, beajoù skol, fiñvusted en Europa dre programmoù ha kenlabourioù gant rannvroioù keveler.

Kennerzhiñ a ra Kuzul sevenadurel Breizh ar Rannvro da vont war-raok war hent ur gwir emrenerezh ha da gas war-raok ha diorren an darempredoù etreremziadoù.

E-koulz an emvod-mañ, kendalc'het eo bet ivez gant labourioù ar C'huzul sevenadurel :

- kinnig an devezh studi war « *Identelezh(ioù) e Breizh* » rakjedet evit an 9 a viz Du 2012 ha dalc'het evit izili an tri bodadeg rannvroel ha dilennidi Breizh istorel,
- krouiñ ur strollad labour evit heuliañ ar « *C'hinnigoù evit kelenn yezhoù Breizh* » votet gant ar bodadeg en emvod meur d'ar 14 a viz Mae 2011,
- krouiñ un eil strollad labour war mont en-dro ha dazont ar C'huzul sevenadurel, da c'houzout e vo adnevezaet an holl izili e 2012,
- anviñ dileuridi ar C'huzul sevenadurel e strolladoù labour ar Rannvro (niverel ha levr war istor Breizh),
- kinnig gant François Le Pillouër, Renner, C'hoariva Broadel Breizh (C'HBB), ha gant Bob Simon, Prezidant, kevredigezh C'hoariva (kengevredigezh c'hoariva e brezhoneg).

Adkavout a rit emvod meur KSB d'an 10 a viz Gwengolo 2011 war www.conseilculturel-bretagne.fr .

Darempredoù : Aurélie Le Brun - 02 99 27 18 31 - aurelie.lebrun@region-bretagne.fr